

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

77. AR PERSON BARVEK

(follennoù 237 - 238)

Eun eskop deus a Franss, den a galite bras
e dont d'ober e visit eur vech en eum tromplas

eur person a velas hag a voa rust a vin
mez baro en devoa evel eur c'habussin.

ar person a nend all a voa bizachet mad
tal huel, a fri kaer, a lem e zaoulagad

an eskop pa er goëlas a komanss de c'hataki
Abalamour de varo a de inkieti

- Doc'h a belech, emean, na doc'h a pe ganton
e zout te deud er vro-man evid beza person ?

hag eun heritik oc'h-hu deus an heritiket
Pe eur beleg benag doc'h ar schismatiket.

- Otrou, eme ar person, a drugare Doue,
Ne don en eb feçon an eïl nag e guile.

Mon gred eur berson mad, katolik koulz a c'houi,
a ne ouzon ked perag en duit dam attaki

- ho paro, eme ar brelat, a kavan diffesson
A ne apparteur ket deus bisach eur person
A troheti pe me a reïo deoc'h ober.
Ne ouzoc'h ket marteze doc'h piou o c'heus affer.

- O bariou zo roet dar goasset
evid o distinga doc'h ar fumelezet
A me ne fel ket din beza fumelezet
Na troha va baro hag hi dija grizet
Pa neket ordrenet din pelec'h monet.

Ne ouffen ket ober vel evid mont da versailles
Da velet ar c'hastel.
enon velin ar Eoue en tremen ag er sorti
Pelec'h benag e zai a pa vo e dribi.
Biskoas non bet enon ag e klevan konta
Nan eus pales er bed komparachet ontan.

~~~~~

Moris Follezour, 22 janvier 1851